

SOUN AR PAOT DEGOURDI

Goulenit soun ar boesouneur

1

Me eo ar sota yanic
Zo bet biskoas er bet
Zo bet biskoas er bet
A zo paya mevelic
Da gousket gant va grec
Setu aze
Evit petra
Rabot eo Fortunia
Rabot eo Fortunia

2

Va grec a va mevelic
A za dar Foar a bel
A za dar Foar a bel
A me rank chom er gear
Da luskat ar c'havel
Setu aze
Evit petra
Rabot eo Fortunia
Rabot eo Fortunia

3

Va grec a va mevelic
A vez o c'hoenat kerc'h
A vez o c'hoenat kerc'h
A me vez dre parkeihier
O kourza var o lerc'h
Setu aze
Evit petra
Rabot eo Fortunia
Rabot eo Fortunia

4

Va grec a va mevelic
A vez o c'horu ar zaout
A vez o c'horu ar zaout
A me a vez o selet
Na c'hoan digne mond do c'haout
Setu aze
Evit petra
Rabot eo Fortunia
Rabot eo Fortunia

5

Pa vezan eat dam guele.
Tomet ganen va Flace
Tomet ganen va Flace
E rankan dont er meas
Dober place dar mevel bras
Setu aze
Evit petra
Rabot eo Fortunia
Rabot eo Fortunia

6

Va grec a va mevelic
O daou memez guele
O daou memez guele
A me vez var ar bank
Na c'hoant digne mond ive
Setu aze
Evit petra
Rabot eo Fortunia
Rabot eo Fortunia

7

Va grec a va mevelic
O devez kique a Farce
O devez kique a Farce
Me mevez an dour bervet
Goal het ar zach e bars
Setu aze
Evit petra
Rabot eo Fortunia
Rabot eo Fortunia

8

Ar vuez ma ne bado ket
A lavaran me deoc'h
A lavaran me deoc'h
Kar me a gustum skouiza
A Force digne da rei peoc'h
Setu aze
Evit petra
Lavaran Fortunia
Lavaran Fortunia

